

Karta vroadel degemer ar vugale yaouank

10 pennaenn vras evit kreskiñ er fiziañs

1

Evit kreskiñ en un doare seder
**em eus ezhomm da vezañ degemeret
ne vern petra e vefe ma saviad**
pe hini ma familh.

2

Mont a ran war-raok diouzh ma lusk din
ha diorren a ran ma holl varregezhioù
war un dro : evidon-me, pep tra zo lavar,
korf, c'hoari, taol-arnod. **Ezhomm am eus
e vefe komzet din, da gaout amzer
ha lec'h** evit c'hoari diouzh ma c'hoant
hag evit seveniñ ma barregezhioù liesdoare.

3

Kizidik on ouzh an dud a zo tro-dro din
hag ouzh ar bed en em ziskouez dirazon.
**Santout a ran e vezan degemeret mat
pa vez degemeret mat ma familh,**
rak ma zud a ya d'ober ma foent orin
ha ma forzh stag.

4

Evit bezañ em bleud ha kaout fiziañs ennon
**em eus ezhomm da gaout tud a vicher en-dro
din evit broudañ, gant madelezh,** ma c'hoant
da zeskiñ, evit lakaat ac'hanon da zaremprediñ
bugale all ha d'ober anaoudegezh gant an traoù.

5

Kas a ran ma spered-krouiñ war-raok ha **dihuniñ
a ran ma skiantoù gant an taolioù-arnod arzel
ha sevenadurel.** En em zigeriñ a ran d'ar bed
gant eskemmoù etresevadurel puih.

6

**Pouezus eo din bezañ e darempred evit gwir
gant an natur** evit mont war-raok.

7

**Pe e vefen plac'h pe e vefen paotr
em eus ezhomm e vefe lakaet ma ferzhioù
din-me da dalvezout,** e-maez n'eus forzh
peseurt stereotip. Memes tra eo evit
an dud a vicher a ra war ma zro. Gant ar
maouezed-se hag ar wazed-se
eo ivez e savan ma identelezh.

8

Ezhomm am eus da vont war-raok
en un **endro kaer, yac'h ha mat evit
divorfilañ ac'hanon.**

9

Evit ma vo graet brav din e ranker ober
brav d'an dud deuet a zo en-dro din.
**Evit labourat gant ar re vihanañ ez eus
ezhomm da gaout mareoù
evit prederiñ, en em ditouriñ
ha komz** etre kenlabourerien
evel gant emellerien all.

10

**Ezhomm am eus e vefe stummet mat
an dud a ra war ma zro** hag
e taolfent evezh ouzh dibarderioù ar bugel
en e oad tenerañ a zo ac'hanon hag
ouzh saviad ar bugel a zo fiziet enno
gant ma zud pe ma fenn-kar.

